


Kân-bale pôtréd yaouank Breiz



Bu - ga - le omp da Zou - e, 'Vel hon za-do gwech-
all; E - vel - te gant e zi - kour Ni stour-mo ouz ar
fall; Nan euz ket bra-soc'h e-nor 'vit kâd Dou - e da dad D'e-
zan hon nerz, Hon c'ha-lon Ha, ma ve red, hon gwad.
Pô - tred yaou-ank Breiz I - zel Poent eo se -
vel ho penn Ya, mar kre-det c'hoaz dis-kou-ez
oc'h gwir gris - te - nien Rag bre -
man nep fell d'e-zan Be - van her - ve ar c'hiz
A renk nac'h fe hon bro goz Ha trei kein
d'an I - liz.

DISKAN.

*Bugale omp da Zoue 'vel hon zado gwech-all,
Evelte gant e zikour ni stourmo ouz ar fall;
Nan euz ket brasoc'h enor 'vit kâd Doue da dad;
D'Ean hon nerz, hon c'halon, ha, ma ve red, hon gwad!*

Pôtréd yaouank Breiz-Izel, poent eo sevel ho penn!
Ya, mar kredet c'hoaz diskouez ez oc'h gwir gristenien,
Rak breman nep fell d'ean bevan herve ar c'hiz
A renk nac'h fe hon bro goz ha trei kein d'an Iliz.

Doue gare hon bro Frans, 'vel n'hall karet mui,
Hag hi lake hec'h enor d'E garet, d'E veuli.
Allaz, tud kriz o deuz c'hoant, o deuz c'hoant da ziframm
Ar Frans, merc'h henan 'n Iliz, euz tre divrec'h he mamm.

Ha dre-oll e rer trubuilh d'he bugale wellan.
Kalz zo skoet 'maez ar vro ; ar re 'chom, 'n eur grenan,
Dre goach 'renk ober ar vad. C'hoaz 'klevont ar re fall
En-dro d'ê gant kasoni, 'vel bleizi, o yudal.

Ha ken huel e yudont ma spont dirak o mouez
Kalz a gristenien glouar, ha kalz o deuz 'vel mez,
Evel mez eus o Doue, ha, 'vit plijout d'an dud,
E lec'h difen o c'hreden. a chom chouchet ha mud.

O Breiz-Izel, mamm ar zent, 'vidout pebez glac'har !
'Vel da vugale gwech-all na oa tud war douar ;
Na oa 'velte kristenien kalonek ha leal,
Kroaz Jezus na lugerne neb lec'h 'vel war o zal!

Neb a ya eneb Doue n'eo ket eur gwir-Vreizad ;
Henez zo treitour d'e vro, treitour d'e vamm, d'e dad.
Ouz e welet, eo mantret ineo hon zent koz,
Mezek 'vitan e gerent a bed er baradoz.

Ha te, bugel digalon, mar teuz c'hoaz eun ine,
Pa zonjez en es kerent, pa bedez war o be,
N' glevéz ket eur vouez klemmus a zav euz an douar :
« Evit petra, ma bugel, 'rez d'in ken braz glac'har ? »

Ma ! plego neb a garo dirak ar re 'deuz c'hoant
Da zianzav o Doue, ha fe o badeiant,
Evidomp, ni anzavo, 'keit ma redo hon gwad,
An Iliz evit hon mamm, ha Doue 'vit hon zad.

Nan omp ket eneb an dud, na c'houlomp drouk da zen
'Met a du omp gant Doue, evel gwir gristenien.
Gant gwad, en Frans, 'oa prenet al liberte gwech-all ;
D'imp-ni, d'an oll eo dleet, kenkoulz ha d'ar re fall.

Ni zo yaouank ha leal ; war roujo hon zado,
Kaer vo harzal ha c'hoari, gant kalon ni 'gerzo ;
Rak ni dianzav Doue hag enor Breiz Izel ?
Dianzav al liberte ? ! Nan ! Nan ! kentoc'h mervel ! !

DRASKIK

